



Photo Jos Le Doaré

Bleun-Brug

Niv. 36

EBREL 1951

Ha paet eo ganeoc'h ho koumanant 1951 ?

Ma n'eo ket, her grit raktal,
Eun tammig bolontez vat mar plij,
Ha bennoz Doue d'eoeh !

- 1) Koumanant bloaz d'an 12 niverenn, brezoneg ha galleg. **400** lur
- 2) Koumanant bloaz d'an 8 niverenn brezonek hepken **300** lur
- 3) Koumanant d'ar 4 niverenn c'hallek hepken **190** lur

**Kas an arc'hant da : V. Seite, Bleun-Brug, Tréboul (Finistère).
C. C. P. 544-22 Nantes. — Lakaat ouz kein ar chekenn-bost pe ez eo
eun adkoumanant, pe unan nevez.**

**Evit kement a zell ouz danvez-skrid ar gelaouenn, skriva da : rener
Bleun-Brug : M. l'Abbé Laurent Bleunven, recteur de Plomelin (Finistère).**

Eur goulenn

Petra 'blij d'eoeh, petra 'zisplij d'eoeh, ha petra 'garfec'h kaout en ho
kelaouenn ? Respontit, mar plij. Klask a raimp ober diouz ho responchou.
Ar responchou gwella a vo embannet e korn al liziri.

Leoriou nevez

Nevez deuet a zindan ar wash :

ANNUAIRE DE BRETAGNE - 300 pa-
jenn. - Skriva da Yvon Laigle, rue Saint-
Michel, Saint-Pair-sur-Mer (Manche) pe
her goulenn er stalliou leoriou breizek.
Priz 465 lur.

Leor a bouez bras hag a deu, evel eun
tour tan, da deurel sklerijenn war da-
chenn Vreiz hag an emzao breizek.

Morse labour ken klok n'oa bet graet,
betek-hen, evit rei da anaout kudennou

ha buhez hor e'hornig bro, en amzer
vremen.

Eur bed bihan eo al leor-se, dre an
niver divent a ziskleriadurioù, a gaver
ennan, diwar-benn kant ha mil dra, tal-
voudus bras d'eur breizad gouzout, en
deiz a hirio.

Prenit ha lennit « Annuaire de Bre-
tagne » ha, m'hen lavar d'eoeh, e tes-
koc'h err bern traou, e berr amzer.

AL LIAMM

kelaouenn lennegel

Un niverenn 80 pagenn bep daou viz

Koumanant evit 5 niverenn : 600 lur

Sekretour : P. LE BIHAN, 1, Avenue Marceau
TRAPPES (Seine-et-Oise) — C. C. P. 5349-06 Paris

Bleun-Brug

TAOLENN

Nevez Amzer , gant L. Bleunven	2
Son an Nevez Amzer , gant Brizeug	3
Broadha ha divroadha , gant V. Fave	4
Eus Chartres da Gastell , gant L. Bleunven hag an Tad Chardronnet	6
An dud du en Stadou Unanet Amerika , gant Gwazgwenn	8
An Tad Maner	9
War da zremm ken flour , gant Maodez Glanndour	10
Kenavo Carda , gant L. Lock	11
Mister Fanch ar Villin-Avel , gant Paotr Treoure	13
Spered glazik	15
Lavariou miz Ebrel ha Pask	16
Ar brezoneg er skollou-Meur	17
Dre Vreiz ha dre ar Bed	18
Pajenn ar Vugale , gant K. Riou	20
Korn al liziri	21
C'hoariou	22
Kantikou Bleun-Brug Santez Anna	23

NEVEZ AMZER

gant Lorans Bleunven

Seul hirroc'h hor beus kavet ar miziou goañv, seul belloc'h eo padet hor gortoz, seul c'houekoc'h e tle beza, hirio, hor joa, dirak an nevez amzer, dizroet davedomp.

Goañv ha goañv a zo. An hini a zo o paouez tremen, ma n'en deus ket kroget rust en hon izili, a lezo, epad pell, en hor spered, ar sonj eus eur goañvez glao hag avel, ar seurt, a drugare Doue, ne vez ket gwelet, alies, en hor c'hornig douar, daoust pegen gourizet eo gant ar mor.

Epad miziou, e c'heller lavaret, an douar paour a zo bet flastret dindan ar gwall varrou hag hon henchou disac'het gant an dour...

Met tremen a ra ar glao, an amzer fall hag ar goañv ivez. War an dismantrou hadet gantañ, dre hor méziou, ar vuhez a zihun adarre, bremañ, kaeroc'h, ha hirvidikoc'h eget biskoaz.

Emaomp e miz ebrel hag en amzer Fask. Tommet gant an heol, luskellet gant an ezennig klouar, ar pezh ne zeblante dec'h, nemet relegou maro, a en em c'holo, hirio, tamm ha tamm, a zeliou tener hag a vleuniou skedus.

Sellit en-dro d'eoc'h : ar spern a wisk o dillad liou an erc'h, al lann o re liou an aour, er prajeler, hag e gwasked ar c'haeou, bokedou diniver, hag a bep liou, a deu da zigeri hag a c'hoarz ouzomp. Er parkeier hadet, an ed, bet ken toc'hor ha ken disliv, dindan frim ar goañv, a deu bremañ liou kreñv d'ezo hag en em led war an anchou..

A greiz splannder an traou adnevezet, mouezliou lirzin a sav, diwar pep bod, deuet da veza eun delenn, evit kana :

« dudi an amzer neve
glanded ha sklerder an nê... »

met ive evit hor gervel ni krouadurien ankeniet, da veuli ganto peurvadelezou ar c'hrouer, ha da zanka dounoc'h, en hor c'hreiz, kenteliou ar basianted hag ar fizians.

N'eus ket da lavaret nann, amzeriou ar bloaz, koulz hag an douarou, a zalc'h aketus da lezennoù o c'hrouer. Ne fazlont ket er gefridi roet d'ezo da aoza magadurez ar bed..

Deuet eo an nevez amzer, mare dudiusa ar bloaz, deuet eo, evel m'eo boaz da zont, gant e oabl glas hag e c'horennou heol, gant e c'hlazvez hag e vleuniou, gant e c'houez vat hag e ganiri, gant e yaouankiz hag e c'hened, en eur ger, gant kement a c'hell c'hoantaat hor c'halon den...

Met, her gouzout a reomp, re vat, kaerder an nevez amzer n'eo ket en em c'hraet en eun dervez, na nebeutoc'h c'hoaz, en eur c'hoari.

Labour ar vuhez nevez en douar, evel e pep lec'h all, a zo eul labour hir ha start.

An douarou-se, hag a welomp, hirio, goloet a c'hlazvez, ste redennet a vokedou, a ra ker bras plijadur d'an daoulagad para warno, an douarou-se, a welomp, a zeiz da zeiz, oc'h en em garga a bromesaou, piou'lavaro an holl boaniou o deus bet da ziwaska epad miziou kalet ar goañv ?

« Ma ne deu ket ar c'hreunenn da vervel, goude m'eo bet taolet en douar, e chom he unan, met ma varv, neuze, e toug kalz frouez... »

Ar pezh 'zo gwir evit an had a zo gwir evit an douar. A-benn rei eostou mat, a lavare ar re goz, an douar a rank mervel diou wech ar bloaz : mervel devet gant an heol en hañv, ha mervel suilhet gant ar yenienn er goañv...

Hag ar pezh a zigouez gant an traou, a zo en-dro d'an den, a zigouez gant an den e-unan ha gant kement a ra.

An traou brao ha padus a ranker kemeret poan hag amzer evit o ober, ha n'eo ket, atao, ar re a gemer poan da hada eo o deus ar joa da eosti.

Goañv hir ha kalet a c'hell beza, a-wechou, e buhez ar familhou, e buhez an Iliz hag ar broiou, evel e buhez an douar. Keit ha ma kaver tud a benn ha tud a galon da labourat ha da stourm evit ar mad, ez eus lec'h da gaout fizians e tispako, eun deiz pe zeiz, amzeriou gwelloc'h.

L. BLEUNVEN.

SON AN NEVEZ AMZER

Eun tremeniad.

Setu an nevez amzer
Petra ganit-hu, mesaer ?
Mesaerig kêz, petra 'gan
Al labousig war al lann ?

Ar mesaerig.

Al labous gant levenez
'Gan ha 'gan e vignonez
El lann evel pep labous
Pep mesaer a gan e zous.

An tremeniad.

Gwell a se ! Kanit atao
N'eo ket hir an amzer vrao
Karit mat ha kanit stank
Laboused ha tud yaouank.

(Brizeug, ar barz bleo melen.)



BROADA HA DIVROADA

gant Visant Fave

Pet kwech n'eus ket bet lavaret d'in :

« Ar Bleun-Brug a lavar d'ar yaouankizou - ha d'ar re all - en em gompren war ar pezh a ra anezo Bretoned : o yez, o istor, o stumm-spered, o doare-beva, o hengounioù (1), o herez lennegel hag arzel... »

» Lavaret a ra d'ezo karet o Bro ha kement a aparchant outi beza Bretoned a galon hag a spered... »

» Daoust ha n'eo ket eur fazi eus ho perz ? Daoust ha ne rit ket gaou ouz ar yaouankizou-se, er mare mar demañ harzou ar broioù bihan - hag ar broioù bras - o koueza, ha mar deo ret d'an dud sellet muioc'h-mui dreist treuzeier o ziez ha kleuzioù o farkeier dre 'n abeg ma sav, etre holl dud ar bed, muioc'h-mui a zarem-pred. »

» N'eo ket strisaat a zo da ober, met kentoc'h digeri ha ledannaat ar sperejou hag ar c'halonou, etouez ar yaouankizou dreist-holl ! »

Setu hag a zo dibunet brao, neketa ?

Mat, a-gwir, ne gav ket d'eomp e vefemp o strisaat dremmwel den ebet, nag o tizec'hj nep kalon : astenn ar c'henta, tomm e gile, ne lavaran ket.

War zigarez distrei an daoulagad diwar ar pezh ma 'z omp - Bretoned dre volontez Doue, gwaz a ze d'ar re a gav hegasus ha kasais kement-se - am eus aon kentoc'h ne vefe graet nemet divroada hep gwrienna pelloc'h, o lezel evel-se sperejou ha kalonou a-istribilh, divouedet abred ha dizec'het pa n'hellont mui suna saour ar vuhez e mammenn ebet.

..

« Eus familh vras ar Frans eo ar yaouankizou-ze, emezor, diskouezit kement-se d'ezo hag e vo awal'h. »

« N'eo ket gwir ! »

Kement ha mont frank, perak chom hanter-hent ha chom hep lavaret dioustu : « Eus familh vras ar bed int, eus familh vras mab-den ; diskouezit kement-se d'ezo hag e vo awal'h. »

..

Araok respont war-eeün klaskomp eun heñvedigez war dachenn al labour.

Setu amañ eur c'halvez ; ar pezh a zo da ober da genta eo lavaret d'ezañ beza eur c'halvez ampart war e vicher ; karet e vicher, en em glevet gant ar gilvizien all, goulenn harp diganto ha rei sikour d'ezo.

Deomp pelloc'h bremañ ha diskouezomp d'ezañ n'emañ ket ar gilvizien o-unan war an douar hag e kavo war an hevelep tachenn-labour gantañ e-unan — eun ti nevez da zavel lakaomp — micherourien hag artizaned all : mañsonerien, toerien, benerien-vein, etc...

Unvaniez a die beza etre ar re holl a labour wardro ar sevel tiez : ma 'z a mat ar bed gant eur skoadrenn ez ay mat gant ar skoadrennoù all.

Pelloc'h c'hoaz e welo rummadoù all a labourerien o poania gant o spered pe gant nerz o divrec'h : holl ez int breudeur, holl o tleont en em glevet, en em zikour, holl ez int eus rummad bras an dud a labour evit rei d'o breudeur boued, bod dilhad, diduamant, deskadurez, etc...

Ar c'halvez n'eo eus ar rummad bras-se nemet dre 'n abeg m'eo kalvez. Micher pe vicher a rank da gaout, anez n'eo micherour ebet !

N'eus den hag a ve micherour hep mui ken.

Seul-vui e vo eun den kalvez ampart hag aketus, pe labourer-douar, pe gere, etc... seul-vui en devo gwir da lavaret eo eus rummad vras al labourerien, seul-vui e rento sikour d'an holl.

..

Distroomp bremañ d'hor Bretoned.

Evit beza eus familh vras mab-den e ranker beza mab unan pe unan eus ar stadou o deus rannet an douar etrezo : pe Fransez, pe Italian, pe Alaman, pe Vreiz-Veurad, etc... N'eus den ebet hag a ve den hep mui ken, eus gouenn pe ouenn e rank beza, eus stad pe stad.

Evit beza Fransez o ranker beza eus unan pe unan eus ar broioù a zo bet unanet evit ober ar Frans : pe eus Breiz, pe eus an Normandi, pe eus broioù ar c'hreisteiz, etc... n'eus den ebet hag a ve Fransez hep mui ken : ganet e rank beza e korn pe gorn eus douar Frans.

Ma tinac'h eun den beza Breton pe Normandiad, etc... Penaos e c'hello lavaret ez eo Fransez ? N'eo nemet eun den divroadet (tennet eus e vro).

C'houi a rebecho d'ar Breized yaouank studia kement a zell ouz Breiz ha poania war dachenn Vreiz ?

Met pinvidigez eur stad n'eo nemet, an eil en eben, pinvidigezioù ar broadou a zo stag outañ.

Evit ar binvidigez spered, pe arzel eo ar memes tra.

Me 'ra eun den kar-e-vro gant al labourer-douar a boagn wardro e barkeier pe e jatal, gant eur pesketaer aketus, gant eur barz pe eun arzour hag a zav oberennou kaer diouz doare e spered ha diouz doare e gorn-bro, gant eun den hag a zeu a benn da lakaat urz vat hag onestiz endro d'ezañ ; ya kar-e-vro kalz muioc'h eget ar re ne reont nemet bogoilh gant komzou goulo war ar garantez-vro ; ar re genta, da vihana, o deus pinvidikaet o bro ha digaset gwellaenn enni.

Deskomp eta d'ar Vretoned karet o bro hag o c'henvroiz hag hag a-dreus ar garantez-se karet ar bed ha karet an holl.

Deskomp d'ezo tañva ha kaout saour gant kement a aparchant ouz Breiz, kement a zo eus herez o gouenn.

Setu hag a gavo hekleo e kalon ar Breizad, setu peadra d'e ziorren kaer, da ober enezañ eun den a-zoare gouest goudeze — digoret ma vezo e spered hag e galon — da dañva kaerderioù ar pobladoù all.

Labour fall eo klask da genta stouva ar mammennou a zevenadur a zeu an dour anezo eus dounderioù ar ouenn, pe o lezel da vont d'an hesk.

Eun amparfal ne vo ken an den pa glasko blaza war-eeün ar sevenadurezioù all.

Broad a eo a zo da ober, n'eo ket divroada eo !

..

Strisaat ar sperajou a lavaran-me ivez !

Me garfe e vefec'h bet en abadenn-studi a zo bet graet e Kemper e diwez miz Kerzu 1950, gant renerien ar Bleun-Brug (gwellit Kroaz-Breiz miz genver).

Strisaat ar sperejou, dizec'ha ar c'halonou !

Digeri anezo frank war ar bed ya !

Tomma hor c'halonou ouz oaled entanet hor bro evit klask entana ar bed.

Broad a eo a zo da ober, gwrienna doun e douar ar vro hag ac'hano strinka dre holl bannou kaer a sklerijenn hag a wirionez dre ar bed.

Setu da ober peseurt labour e pedomp an holl yaouankizou da zont d'ar Bleun-Brug.

V. FAVE.

(1) Traditions.

Eus Chartres da Gastel da heul Sant Gildwen

gant L. Bleunven
hag an Tad Chardonnet




Photo Jos Le Daaré

Lennet ho peus war Groaz Breiz an divras eus ar pezh m'eo bet Bleun-Brug Kastel.

Hag ho peus gwelet eo relegou ha skeudennou ar zent koz, degaset di eus pevar c'horn Breiz, ha zoken eus Bro e-hall, evit beza enoret asambles, eo o deus roet d'ar gouellou eur sked dispar, er bloaz-man.

Lavaret am eus Bro-e-hall, ha lavaret a ran war ar mar-e-had, ar relegou o deus chachot war-du enno ar muia sellou eo,

hep mar ebet, re **Sant Gildwen**, a deus war eün eus Chartres hag a oa douget, ken kran, gant tud yaouank, gwisket e skouted.

Met ar Zant-se, hag a zeblant beza eur zant nevez evit an darn vrasa ac'hanomp, plou eo ha penaos eo deuet da c'houlou ar Bleun-Brug? Kiriüs a-walc'h eo da c'houzout.

Plou eo Sant Gilwen? Daoust d'ezañ da veza tostoc'h d'eomp eget ar zent koz, ne anavezet ket nemeur a dra diwar e benn.

Ar pezh a ouezer mat eo, ez eo eur breizad, bet ganet e Breiz, e Combours, demdost da Zant-Malo, er gêrig-se, a zo bet ken brudet, abaoe, gant unan all eus he bugale: Chateaubriant.

Gouzout a reer ouspenn ez eo marvet

e bleun e yaouankiz, d'an oad a 25 bloaz hag eo bet laketañ e ano war roll ar zent, d'an 9 a viz mae 1165, eun tammig nebeutoc'h eget daou c'hant vloaz, araok **Sant Erwan**.

Hervez ar skridou, a ra meneg eus e vuhez, ez oa bet kinniget d'ezañ, en abeg d'e furnez, beza arc'heskob Dol, pa n'oa c'hoaz nemet 23 bloaz.

Met spontet, dirak eur garg ken pounner, e kavas gwelloc'h tec'hout, ha diwar neuze ec'h en em c'hreas perc'hirin ha baleer bro.

O tizrei eus a Rom, el lec'h m'oa bet o pardona, eo e varvas e Chartres, e tro ar bloaz 1077.

Er gêr-ze, eo e voe beziet, hag, epad meur a gant vloaz, e relegou a voe miret eno gant kalz a enor. Met d'an dispac'h vras, evel ma c'hoarvezas e plasou all,

e voent kuzet, ha kuzet, ken mat, ma ne oant mui kavet goudeze.

Hag a-barz pell, Sant Gilwen hag e relegou, a voe dizoñjet, betek an deiz, d'ar 26 a viz mae 1944, ma voent dizoñjet a nevez, evel dre vuzud, gant eur vouled karr-nij, a ziskaras moger an iliz, m'oant bet kuzet enni.

Abaoe, Sant Gilwen a zo deuet e c'hloar da greski muioc'h mui, dre m'eo bet dibabet, gant ar Vretoned divroet, evit beza o Paeron hag o Patron.

Choaz all ebet ne c'helle beza gwelloc'h, pa ouezer en deus tremenet bloaveziou diweza e vuhez, pell ive diouz Breiz, bro e gavel.

EN HENT WAR-DU AR BLEUN-BRUG

Pa voe graet ar c'halvadenn d'ar parreziou evit degas o sent koz d'ar Bleun-Brug, den ne zontje e vije aet an hekleo anezi en tu ar da harzou Breiz. Fazioe oar. Ar Vretoned divroet o doa he c'hlevet.

Skouted Bleimor Pariz a lakeas kalet en o fenn kaout o relegou.

Goude beza klasket en aner kaout relegou Sant Samson ha Sant Magloar, a zo miret eul lodenn anezo e iliz Sant Jakez, e Pariz, ec'h en em drojont gant fizians ouz o c'henvroad enorus, an Aotrou N'Eskob Harscoet eskob Chartres, evit goulenn digantañ rei d'ezo relegou Sant Gildwen.

Hemañ, anet d'eoc'h, a asantas o rei, a greiz kalon.

Laouen eus o zaol, ar Vretoned yaouank, hag a felle d'ezo ober mat an traou, a en em glevas neuze gant eun Tad, eus obladed Mari dinamm, da zont d'o bleina ha da zigeri d'ezo an hent.

Hag evelse, d'an deiz kenta a viz eost, hor pardonerien a guitaas Pariz, a ziskenne betek Chartres evit kemeret o zeñzor.

An oferenn, da genta, mintin mat, ha goude an Anjelus brezonek, ec'h en em laker en hent war-du Penn-ar-bed...

A-benn an abardaez en em gaver e Pontmaen, kêr ar Werc'hez, war dreujou Breiz.

Adalek neuze e koumañs, e gwirionez, hent ar relegou hag e kemer ar gentel roet ganto he gwir zalvoudegez...

Re hir a vije displega amañ an digemer kalonek graet d'ezo er parreziou hag ive an testeni dispar a feiz roet gant eur yaouankiz a veve ken birvidik he c'hredennou hag « a zalc'he ken start d'he huñvreou kaer, a zo trec'h d'ar bed. »

Diou barrez, e teuez ar re all, a vodo muioc'h a dud en-dro d'ar relegou santel: Combours bro c'hinidik Sant Gildwen ha Landehen, eur barrez, eus eskopti Sant Brieg, el lec'h ma z'eo Patron.

Met ar brosesion a en em renko evit mat e Montroulez. Dirak eur mor a dud diredet d'he zaludi, e kemero hent Kastell, penn ar veach.

War an troad, en eur bedi hag en eur gana kantikou ar Bleun-Brug, eo e vezo graet, e berr amzer, ar pennad hir a vale-se.

Dirak relegou ar zent, en em gavet da genta, Kastelliz a zo, koulz lavaret, holl war sav o c'hortoz.

Ne esperont ket o meuleudiou d'ar re a deus daveto, gant holl nerz o feiz ha tan o yaouankiz, en ano o breudeur hag o c'hoarezek divroet, evit diskouez e choment bepred:

« Bretoned dreist an holl vadou

» Feal d'ar C'hris, Doue o Zadou. »

Ne c'hellan ket echui hep lavaret eur ger eus ar banniel a heulie relegou Sant Gildwen, banniel bet treset gant X. Haas, hag a roe d'ar strollad eun ton ken beo ha ken breizek.

An Ao. N'Eskob Fauvel he c'havas ker kaer, ma c'hoanteas he benniga, en iliz-veur, d'ar zadorn d'abardaez, o karga evelse, a levenez, kalonou ar re yaouank, o doa sellet ken nebeut ouz o foan evit dont d'ar Bleun-Brug.

Ar banniel-se a zo da veza roet da skouer d'hor parreziou.

A-benn Bleun-Brug ar zent a zeu, e vije dileet d'ezo kaout o banniel breizek nevez, gant eur ger-stur hag eun dresadenn, a verkfe, ar gwella, spered ha menozlou pep hini.

Gouellou ar Bleun-Brug o tizelei dirazomp koantidigez ha pinvidigez hor Breiz Izal, a dle hor zikour d'ober anezi eur vroad tud kreñv ha tud santel.

L. B. hervez an Tad Chardonnet.

AN DUD DU EN STADOU UNANET AMERIKA

gant Gwasgwenn

14 million a dud du a zo er Stadou Unanet, tud o tiskenn eus ar Vorianed bet degaset en Amerika evel sklaved, e-pad ar seitekvet-triwac'hvet kantved, da servijout da labourerien e mereuriou bras ar c'hreisteiz. Pez a zo a-dreñv en amzer eo eta da gentañ an dra euzus-se a zo bet anvet Gwerz ar Vorianed (la traite des Nègres), hag en deus kendalc'het betek penn-kentañ ha zoken kreiz an 19-vet kantved. Moarvat, abaoe 1866 ne vez ken sellet an dud du en Amerika evel sklaved. Pez a chom koulskoude eo ur voger-disparti etrezo hag ar re all : pez a anver er Stadou Unanet ar Segregation pe colour bar. Daoust m'o deus an dud du dirak al lezenn ar memes gwirioù hag ar re all, e rankont koulskoude beya disrannet diouz ar re wenn, ha chom en o fort-o-unan. Ar slogan a reer gantañ hag a vez lakact da dalvezout diwar o fenn, dreist-holl en Stadou ar C'hreisteiz, eo hemañ : disrannet met ingal.

Disrannet e chom an dud du diouz ar re wenn, e pep lec'h, er skolioù, en tiez-debri, e ti ar perukenner, en trenioù, er c'hirri-boutin, zoken en ilizoù, ha betek er beredou. Goude bezañ disrannet evelse diouz ar re all, mogeriet ha klozet evelse en o fart-o-unan, daoust hag e c'hell bezañ lavaret c'hoaz, ez int ingal gant ar re wenn, ha war ar memes pazenn ganto ?

Aes eo kompren e klask an dud du o-unan, diskar ar voger-disparti. Dreist-holl p'emañ an dud du o sevel muioc'h mui betek ar c'hargou hag ar micherioù uhela : niver ar studerien du a zo bremañ ugent gwech brasoc'h eget hanter kant vloaz 'zo. Tud du a zalc'h en ijinerezh (industrie), en arzou-kaer, el lennegezh, er skolioù-meur, lec'hioù eus ar re bouesusa. Un Amerikad du, Ralph Bunche, eo an hini en deus kemeret e Palestina, lec'h ar c'hont Bernadotte, evel hanterour (médiateur) ofisiel a berz ar Broadou unanet (Nations Unies).

Tamm ha tamm evelkent e reer toullou er voger-disparti. Er bloavezioù diwezañ ez eus bet, da skouer, barnedigezioù a du gant ar re zu, dreist-holl war dachenn al lojeiz. En 1948, Ministrerezh ar Soudarded en deus dispennet kuit ar rejimantou du : hiviziken e vo an dud a liou er memes strolladoù soudarded hag ar re wenn, hag an ofiserien du a c'hell koulz hag ar re all sevel d'an holl derezioù-karg, en arme war zouar pe en arme war vor.

N'eus nemet nebeut a gatoliked war ar pevarzek milion-se a dud du, 5 milion hanter a zo protestanted, 350.000 hepken a gatoliked, ar peurrest o vezañ eus iliz ebet. Ar Gatoliked wenn koulskoude a ra kalz en Amerika eiz an dud a liou. Diskar ar voger-disparti a zo mennad ar « Catholic interracial Movement », (Emzao katolik etre gouennou). E soñj a zo lakaat da dalvezout etre ar re wenn hag an dud du, menozioù ar relijion gatolik : ha se, en degouezioù resis ar vuhez, evel mont da welout patroned evit ma tegemerint tud du en o stal-labour ...Ouspenn-se evel just, prezegennou, bodadegoù.

An « Emzao » en deus a benn bremañ strolladoù en holl gèrioù bras ar Stadou Unanet. An hini kentañ diazezet a zo bet hini New York. Ha bremañ ez eus strolladoù hañval en Detroit, Los Angeles, Chicago, Brooklyn, Washington, Hartford. Dindan pouez an Emzao e weler muioc'h mui, skolioù-meur, skolachou, skolioù-leaned, kouenchou, kloerdiou, parrezioù o tegeri hep dispartia ken an dud du diouz

ar re all. Bihan eo c'hoaz niver ar veleien du (35 hepken) er Stadou Unanet a-bez, met a hep tu e klasker lakaat anezañ da greski. Ar C'hardinal Spellmann a ro harp e pep doare da emzao an dud du. Ar Pab Pi daouzek e-unan en deus kaset eul lizer da destenia e garantez e-keñver an dud du hag ar Gatoliked a labour evit gwellaat o stad hag o adsav.

Ar c'houlz mat eo evit al labour. Met kalz a zo d'ober. Ha poent bras eo. Rak kement na vez ket graet war dachenn ar mad gant ar Gatoliked, a servij d'ar Gomunisted war eun dachenn all, da lavarout eo, evit kas da benn o soñjou d'ezo. Ne c'heller ket chom diseblant dirak diézamantou an nesa, hep na drofe a benn ar fin a-enep d'ar re diseblant.

GWAZGWENN.

AN TAD MANER

Holl lennerien « Bleun Brug » o deus klevet komz eus an Tad Maner, misioner breizat, lesanvet gant hon tud koz an Tad mat, marvet e Plevin (Côtes-du-Nord) er bloaz 1683, leun veritou.

An enklaskou graet war e vuhez o devoa diskouezet, pellik' zo, pebez servicher bras oa bet da Zoue. Ar mirakloù, ret evit e lakaat war roll an dud eurus, n'oant ket bet studiet mat a-walc'h, betek-hen, e Rom.

E penn kenta ar bloa-mañ, Hon Tad Santel ar Pab en deus digemeret daou anezo. O daou int c'hoarvezet en eskopti Kemper.

Ar c'henta eo parcañs eur baotrezig eus Karaez, Yvona ar Go. D'ar 17 eus mezeven 1921, e oa pilet gant eur c'harr dre dan, ha dastumet diwar an hent, hep anaoudegezh. Traon he fenn a oa bet faoutet. Epad daou zvez e chomas etre ar beo hag ar maro, hep fizians ebet da barea, hervez ar vedisined.

Pedet e voe an Tad Maner, a greiz kalon, ha lakaet e voe e imaj war gorf ar glañvourez. Goude daou zervez, ar vere'hig a en em gave pare klok. Yac'h pesk eo abaoe. Dimezet eo bremañ.

An eil mirakl eo parcañs Mari Cridou, eus Plozeilh. E 1910 e santed dija warni roudou kenta ar c'hleñved skevent. E 1926, testenioù ar vedisined a verkas sklêr oa aet doun ar c'hleñved enni. Evel ma wasae he stad, a zizun, da zizun d'an 13 a viz genver 1931, ez eas, kazelliet gant diou vignonez d'ezl, da zaoulina war bez an Tad Maner, da Blevin. Goude eur veaj hir ha poanios, ec'h en em gavas dioustu gwelloc'h en eur lakaat he zreid war dreujoù an iliz. Digouezet eun nebeudig goude, war bez an den santel, ec'h en em gavas pare, en eun taol. Sevel a reas, lavaret ar rozera, ober hent ar groas chom pell war he daoulin. Deuet d'ar gêr e stagas gant al labour war-dro an tiegezh, evel ma ne vije bet morse klañv...

D'an 20 an viz mae hon devezo ar blijadur da welout ar misioner bras ha santel, ma z'eo an Tad Maner, hag en deus sanket ken doun e roudou war zouar Breiz, o reseo enorioù ha kurunenn an dud eurus.

Gouelioù kaer a vo graet d'ezañ, en deiz-se e Rom ha dre Vreiz a-bez. Plijet gantañ hon harpa hag hor sikour da viret en o c'haer ar brezoneg hag ar feiz.

WAR DA ZREMM KEN FLOUR

Suok bale

War da zremm ken flour, gwechall, o va Breiz ! 're - de an
dour pa c'horto-zes an deiz, Ma lin-tre war da benn goude an
noz teñ-val Ar Fran-kiz o tri-dal Er skleri-jenn...

1 — War da zremm ken flour, gwechall, o va Breiz,
'Rede an dour pa c'hortozes an deiz,
Ma lintre war da benn, goude an noz teñval,
Ar frankiz o tridal
Er sklerijenn.

2 — A-dreuz da zaerou, eur ganevedenn,
A bar, hizlo, skedus 'vit ar bed holl,
O kemenn da bep den, ne c'hell ket mont da goll,
Ar vro he deus kredenn
'N he flanedenn.

3 — Youc'h, hizlo, el levez, o va Breiz !
Da vibien, en-dro d'it, en eur skrijal,
A sav an tan 'n o c'hreiz, da deurel a-bouez penn,
Eur ganaouenn o strakal
Er sklerijenn.

Ton Iwerzonat
adstummet e kan-bale ha komzou
adaozet ivez gant Maodez Glanndour.

KENAVO, CARDA

gant Loeiz Lok

Eur gerig a ganv war Groaz Breiz a gasas d'he lennerien kelou maro an aotrou René Cardaliaguet, « an ao. Carda, evel m'edo ar c'hiz d'e henvel ».

Lavaret eo bet gant an aotrou'n Eskob peseurt den, peseurt beleg, peseurt skrivagner eo bet an ao. Carda. Meuleudi a bep seurt a zo bet lennet er c'hazetennou hag er c'helaouennou. Ankounac'haet ez eus bet diskleria petra en deus grêt evit Breiz.

Breizad 'oa, Carda, ha Breizad kalonek.

Breizad hag a oar perak. Hen diskleria 'reas meur a dro, dreist holl war ar « C'hourrier » er pennadou « Privilèges de Bretagne », « La défense du breton », « A Jean-Marie qui refuse le breton à l'école », « Deuxième à Jean-Marie ».

« Breizad ha gall, ya emezañ ; hep brezoneg ? « Il faut sauver le breton et le Breton. Pour l'honneur, l'intérêt et la foi, les Bretons doivent parler leur langue, la bien parler, la faire parler autour d'eux. Elle est belle et noble, vivante et généreuse, tenace et progressive... elle est un bien de famille, un héritage auquel on ne renonce pas sans déchoir et sans trahir... Le breton a toujours été et doit rester la langue de la vie religieuse. Les Apôtres ont donné l'exemple, ils ont prêché à chaque peuple en sa langue. Les missionnaires ne font pas autrement. Les Papes ordonnent de les imiter. C'est la voix du bon sens... Trop d'exemples ont prouvé que délaisser la langue a conduit à négliger la religion... Il ne s'agit pas d'exclure le français... »

Kemenñ all a lavare da « Jean-Marie » a c'hrozmoie abalamour e ranke e vere'n deski brezoneg en he skol, gourc'hemennet m'oa bet hen ober gant an Aotrou'n Eskob : « J'ai fait l'école du soir, pendant quinze ans, à des jeunes gens... Pour leur apprendre le français il fallait leur enseigner le breton... L'école est maîtresse indispensable. Sans elle la langue se perd, et nous le constatons douloureusement.

Vous et moi, nous tous sommes fiers d'être bretons. Et il y a de quoi être fiers... C'est une loi historique qu'un peuple qui perd sa langue perd en même temps son esprit et ses traditions, tout ce qui le relie au passé, qui fait son originalité dans le présent, qui assure son existence dans l'avenir. Puisque nous voulons rester des Bretons... il faut garder notre langue.

Et pour qu'elle tienne, l'école doit l'enseigner. »

..

Skrivet eo bet an traou-ze en amzer a drubuilh, gant eur Breizad kalonek eta. Kalonek e ranke beza evit fiziout lakaat moula e genavo da Jean Marie Perrot. (Le Courrier du Finistère, 8-15 Janvier 1944.) Evel ma vije e destamant e unan emañ o tiskleria, rak goudeze Carda a jomo mut, breset e galon dindan samm ar rebechou laket warnañ war gant ha kant digarez.

Peseurt breizad ha peseurt kristen a c'hell chom dizeblant ouz lenn an daou bennad-se ? « Breiz ! Ah certes il l'a aimée d'amour, d'un amour de préférence ; il l'a chantée, exaltée, défendue, et pour sa part, ressuscitée, lorsque trop d'oubliés, d'ingrats et d'aveugles plus ou moins volontaires la dédaignaient, la fuyaient, la reniaient et préparaient pour sa dépouille le linéol et la tombe inéluctables... Breiz, oui, mais Feiz d'abord. Breiz, chérie comme une patrie terrestre ; Feiz, plus chère, fille de Dieu, vraie patrie, des âmes, sans laquelle Breiz n'aurait pas été elle-même et qui doit régner ou Breiz succombera. Toute l'œuvre de M. Perrot a jailli de cette conviction. »

..

Ar beleg hag ar breizad kalonek a oa anezañ digant plou oa deuet d'e spered seurt magadurez ?

Lavaret ez eus bet hag e vezo, emic'hañs, penaos ha gant plou e voe Carda henchet warzu ar velligiaj. An curvad en deus bet da veza bouc'het e vicher e Gwitalmeze, da gaout eno da berson, an aotr. Grall hag a oa eur beleg dispar e pib doare hag eur breizad ken dispar all. Kannad ar Galon Zakr a oa bet savet gantañ e 1886 ; rener retrefou brezonek Lesneven edo hag ivez unan eus renerien ar « C'hourrier ». Kenta kannadig eur barrez, a gredan, eo hini Gwiltameze bet

savet da viz Kerzu 1902 prestik eta goude ma voe lakat an aotr. Carda da gure d'an aotr. Grañl Hemañ a harpe c'hoaz « Feiz ha Breiz », « Kroaz ar Vretoned » ha pep tra moulet e brezoneg. Skriva'rae war niverenn genta ar C'hannadig: « Deskomp galleg d'hor bugale. Mez ne ket eur rezon evit delezer ar brezoneg. Dale'homp da yez hon tud koz. Peseurt droug a reomp-ni o komz ken etrezomp e Brezoneg hag o selaou displega d'eomp al lezenn gristen e Brezoneg? » Enebi a reas ouz al lezenn a zifenne ouz an veleien ober gant ar brezoneg en ilizou.

Kroaz Breiz a lavar ne skrivas ket a levriou e brezoneg. Eur fazi eo. Eul levrig: Kalon Jezus tronet en tiegeziou a zo bet graet gantañ.

E brezoneg Leon e lakeas « Job al lounker », pezh-c'hoari aozet gant Job ar Bayon e yez gwened. E brezoneg e lakeas ive « Jann d'Arc », pezh-c'hoari gallek G. Gourdon, hag ar peziou-c'hoari all « Dre ar Bugel » ha « Judas ». An daou bez-mañ a oa bet savet e galleg gant e vreur medisin, Félix Cardallaguet ha setu hag a lakaio ar furcherien da entent an ano a zo douget war an daou bez-c'hoari: F. R. Breudeur, da lavaret eo: « Félix, René, Frères. »

M'o dije holl veleien an eskobti graet kement hag an aotr. Carda evit Breiz, ne vije ket ar Vretoned hirio o soñjal, gant enkrez, war amzer da zont o bro garet.

Ha setu perak ivez em eus, gant tristidigez heuilhet e relegou paour betek bered Gwitalmeze. E amzer burgalor en deus tremenet war an douar e-doug e vloaveziou diweza. Laouenaet int bet, a-dra-zur, en o diwezadou, gant ar c'helou a deus betek ennañ eus lidou kaer ar Bleun-Brug e Kastell-Paol.

Kement en deus karet ha lakat karet Sant Breiz m'o devezo e zigemeret gant joa.

Kenavo, Carda!

Kanvou Bleun-Brug

ERBEDI A REOMP OUZ HON LENNERIEN

AN AOTROU CHALONI PERENNÉS

Ginidik eus a Dreoul, marvet d'e 76 vloaz, e Treoul, d'ar 5 a viz Meurz.

Unan oa eus beleien desketa hon eskopti. Bet epad pell amzer kelenner e kloerdi Kemper, war ar skritur sakr, e skrivas daou levr kaer diwarbenn ar Psalmou.

Goude beza kuitaet ar c'hloerdi, e-doug 25 bloaz diweza e vuhez, e labouras dreist-holl war dachenn Breiz. Furchal a reas ar paperiour koz evit driframma diwarno sklerijenn war istor ar c'hantvejou tremenet.

Sevel a reas istor meur a barrez, pennadou a voe embanet e « Bulletin diocésain d'Histoire et d'Archéologie »; Buhez an Tad Abgrall; Dom Mikael an Noblez; Santez Anna E Breiz, hag all.

Edo a zevri gant an ell kevrenn eus an « Dictionnaire topographique »; pa zeuas an Aotrou Doue d'e c'hervel ha da vont da chana da welloc'h bro.

AN TAD BARNABE

Ginidik e oa eus Plogonneg ha marvet eo e kouent Kapusined Resko, d'e 78 bloaz d'ar 4 a viz Ebrel diweza.

Misioner ha prezeger brudet eo bet. N'eus ket kalz a barrezioù e Breiz-Izel, ha n'int ket bet sklerijennet gant e gomzou birvidik.

Mar doa distagellet e deod, e bluenn ivez a oa lemm. Sevel a reas kalz kantikou nevez. Meur a hini anezo a gaver e leor kantikou an eskopti. Gant ar re vraoa emañ ar c'houbladou staget ouz kantik « Da feiz hon Tadou koz », kantik ar bedenn, kantik Jezuz Krist Roue ar Bed.

G. BERTHOU-KERVERZIOU

Rener e oa hemañ d'ar gelaouenn « Ogam » ha marvet eo e Roazon. Gouizek bras e oa war an amzer goz, ha skriva reas traou a bouez war an danvez keltiek.

Mister Fanch ar Vilin Avel

gant Paotr Treoure
hervez eur gontadenn
gant A. Daudet




Photo Jos Le Daaré

Gwechall goz, e kalz parrezioù, ne oa da vala ar greun d'an dud keiz, nemet milinou avel. Eur rod vras askellok, o trei dindan fierz an avel, a lakae herr e rojou houarn, ar rojou houarn a lakae herr e rojou mean plat, hag etre diou rod maen, ar greun a veze malet ker brao ha tra.

Pa deuas ar c'hiz euz ar milinou bras dre zour, ar milinou avel a voe buan dilezet, ha ne voe gwelet mui evel diaraok, ar milliner o vont war vare'h da gas d'an tiegeziou, en eur gana alies dre ma' z ae ar bleud en doa tennet eus o sac'hadou greun.

E-kichen Brest koulzkoude, pell-bras goude m'oa deuet ar c'hiz eus ar milinou bras dre zour, e oa eur vilin avel hag a zalc'he atao da vont en-dro; hag atao e weled, diou pe deir gwech bep sizun, da bardaez, ar milliner koz, Fanch, o vont en hent war vare'h, azezet war dri pe bevar sac'had bleud. Da blou e kase anezo? Den n'her gouie.

Den ebet ne roe d'ezañ greun da vala. Ha daoust da-ze, pa c'houlenned digantañ:

— Ac'hanta, Fanch, al labour a ya atao endro?

— Ya, ya, eme Fanch, ken seder ha tra. Labour a zo, n'eus forz pegement.

— Hag eus a be lec'h ho peus bet greun da vala?

— Peoc'h! Peoc'h, eme Fanch, me a labour evit an diañvez-bro.

Ne lavare ket muioc'h. He den ebet ne c'helle lakat e dreid er vilin, da welet petra oa enni. E vere'h yaouank Yvonaig he-unan ne z'ae morse ebarz.

Pa dremeneu e kichen an ti, e kaved atao an dorjou prenet, hag e weled atao rod vras ar vilin avel o trei, ar marc'h o peuri war al letounenn hag ar c'haz, treut ha koz, oc'h heolia war rizeñ ar prenestr, o tufal, prest da lammet ouzoc'h.

Eur mister bras oa buhez ar milliner koz, hag an teodou a yae en-dro - « Aze, a lavare lod, e tle beza muioc'h a verniou arc'hant eget a zac'hadou bleud. »

Abarz ar fin, ar mister a voe dizoloet, ha setu amañ penaos.

Job an Tiek, eun amezok da Fanch, en doa eur vombard, hag a ouie c'hoari ganti. Eun dervez e lakeas ar yaouankizou eus ar c'harter da zañsal, hag e welas d'ouztu oa gwall-droet e vab, Yonig, gant Yvonaig, merc'h ar milliner. - Mat awalc'h, emezañ outañ e-unan; Yvonaig a zo eur baotrez a zaore, hag a dle kaout peadra. Met ne garfen ket gwe-

lout va mab o c'hoariellat war he zro, epad re-hir amzer. Gwella vije d'ober eo o fortuna, ar c'henta ar gwella.

Ha setu hen d'ar vilin da glask en em glevet gant Fanch koz. Siouaz! Eun digemer trefk a voe graet d'ezañ... Fanch ne zigoras ket dor e di. Dre doull an alc'houez eo e rankas Job lavaret d'ober petra oa deuet. - « Klev'ta, Fanch, emezañ, Yonig hag Yvonaig a en em glev mat, betek re-vat marteze. En em garet a reont. Ne gavets ket e vije gwelloc'h o fortuna dioustu? »

— « O fortuna dioustu? eme Fanch, kê'ta da c'hoari gant da vombard adarre. M'az peuz kement a vall da fortuna da vah, gwella ' peuz d'ober eo mont da c'houlenn evitañ unan pe unan eus merc'hed yaouank ar milinou bras. »

Ne rannas ger all ebet... Yonig hag Yvonaig, pa glevjont ar c'helou, a zivizas mont o daou, d'o zro, d'e welout. « Kit'ta, eme Job, ha chañs vat d'ec'h. »

Pa errujont e kichen ar vilin, Fanch a oa o paouez mont huit, hag an nor a oa prenet evel ma veze atao... Met ankounac'haet en doa eur skeul, a welad eno dirak eur prenestr. Setu an daou zen yaouank dao er vilin dre ar prenestr. O! truez! Kambr ar vilin a oa goull. Tamm greun ebet, tamm bleud ebet enni, e neb lec'h. Ar c'haz a oa eno adarre, kousket war ar maen mala, etouez ar boultrenn hag ar gwlad-kevid. E traoñ ar vilin, netra ken nebeut, nemet eur gwele distreset, eun nebeut truilhou, eun tamm bara kras hanter-zallhet gant al logod, hag en eur c'horn-tro pevar zac'had grae ha pri gwenn, e sier diskolpet.

Mister Fanch a oa pelloc'h dizolaet; ar grae hag ar pri gwenn eo a veze kaset ha digaset gantañ war gein e vare'h, evit rei da gredi d'an dud en doa eun tamm labour bennak en e vilin.

En daelou en o daoulagad, an daou zen yaouank a deuas buan da gonta da Job ar pezh o doa gwelet.

Job a jomas eur pennad evel sebezet, strafuilhet ha glac'haret.

Met, hep chom da dortal, e redas da gaout an amezelen all, da gounta d'ezo an abadenn. Hag ar re-mañ, holl a-unan, a en em glevas evit kas dioustu d'ar vilin avel kement tamm greun o doa en o ziez.

Ha dao en hent gant o c'hezeg, karget a zac'hadou greun.

Pa errujont er vilin, Fanch koz a oa eno o ouela dourek. Rak gwelet en doa e oa bet tud er vilin epad ma rê e dro... « Emaoun kollet! amañ n'eus mui nemet mervel d'ober, emezañ a vouez uhel, en eur hirvoudi, e benn etre e zaouarn. O! va millin gêz, petra deui da veza? An holl a ouezo bremañ ne ' m eus tamm greun da vala. »

Met pa welas ar c'hezeg o tont d'en em renka dirak ar vilin gant o sac'hadou greun, ha pa glevas an amezelen o krial: « Alo, Fanch, amañ 'z eus labour evidout. » e dal a ziroufennas buan. Ha pa voe taolet ar greun ruz-melen a verniou war leur ar vilin, e stouas d'o floura gant e zaouarn krizet, hag e lavaras, dem o c'hoarzin dem o ouela: « A! setu amañ greun a zoare! O! Doue trugarezus! Pegen kaer, pegen kaer int da welet. »

Ha troet ouz an amezelen: « Me ' ouie ervat, emezañ, e vijec'h-deuet en-dro. Paotred ar milinou bras n'int nemet laeron, n'int nemet laeron! »

An amezelen a garfe beza graet eun tamm gouel en e enor.

— Nann, eme Fanch koz. Lezit ac'hann da rei boued d'am millin. Keit all a zo emañ-hi war yun, hep netra da, lakaat etre he dent. »

Hag ez ae hag e teue, ar paotr koz, o tigeri ar sier, o leda ar greun war ar maen, hag o sellet gant dudi ouz ar bleud fin a nije tro war dro, betek ar zoller.

Ret hen anzao, ar garantez n'eo ket maro c'hoaz e Breiz-Izel. Azalek an deiz-se, morse al labour ne vankas da Fanch koz ar vilin - avel.

Nebeut bloaveziou goude, e voe kavet maro e kichen e rojou. Ha rod askellok ar vilin avel a baouezas da drei, en dro-mañ evit atao.

Rak den n'en deus kemeret plas Fanch koz.

Petra reoc'h? Tremen 'ra peb tra er bed-mañ. Ha da gredi eo emañ tremenet da-vat amzer ar milinou dre avel, evel m'eo tremenet amzer ar frailhon da zourna an east, ha slouaz ivez, amzer ar c'hoefou brodet hag ar gwiskamanchou kaer a rae gwechall kement a vrud d'hor Breiz-Izel.

Fentigell

SPERED GLAZIK

Gwechall goz pa veze tennet d'ar zort evit mont da soudard e veze gwelet krogadou start etre paotred yaouank ar parrezioù evit gouzout piou a vije ar mestr.

An istor a zo amañ warlerc'h a erruas, en eun tu bennak war-dro Kemper, etre ar c'hlaziged hag ar Vigouened.

..

Glaziged ha Bigouened a zo amezelen. Ne lavaran ket int bet atao amezelen vat! Alies e veze kannou etrezo, ha dalc'hmat e teue ar maout gant ar C'hlaziged. Ar Vigouened, koulskoude, a zo paotred yac'h ha kreñv; en o c'hichen, ar c'hlaziged ne vefent nemet koz tammou kornandoned.

Eun deiz, ar Vigouened a en em vodas evit gouzout perak e pakent atao lamm. Den ne gavas netra.

— Ha ma vefe kaset eur c'hannad, eme unan, da gaout ar c'hlaziged da c'houlenn diganto petra'ra d'ezo bepred gounit warnomp ar maout?

— Mat-tre, eme an holl.

Youen Vras, abalamour d'e nerz (dleez e oa ober aon d'ar C'hlaziged) a voe dibabet da vont.

Hag heñ da gaout ar C'hlaziged.

— Baztagn! paotred! me eo Yann Vras deuet a-berz ar Vigouened da c'houlenn diganeoc'h perak, c'houi tudigou dister, a c'hounit warnomp bep tro ma vez kannou etrezomp.

— Petra ' zo kaoz, eme eur Glazig? met ar spered na petra 'ta?

— Ar spered? eme Youen Vras. Met petra eo an dra-se, ar spered?

— A! n'ouzout ket? Gortoz ma tisplegin d'it: Sell! setu amañ eur wezenn. Warni, a-blad, me a laka va dorn dehou. Te, gra eur c'haloupadenn betek kant metr a-c'hann. Pa rin sin d'it, deus warnoun a-benn herr, ha dare'ho war va dorn eur mell taol, ken kreñv ha ma c'helli.

— N'eo ket diès, eme egile.

Hag hèn mont. Dont a reas en-dro gant tiz bras, hag erruet gant ar wezenn e tare'hoas eur mell taol. Siouaz! ar Glazig, paotr fin, a dennas e zorn a-bred a-walc'h ha dorn egile a yeas gant e holl nerz d'en em flastra war ruskenn galet ar wezenn...

Hag e c'houlenne ar Bigouden digant ar Glazig en eur c'houeza en e zorn kignet:

— An dra-se eo ar spered?

— Ya, eme egile, an dra-se eo!

Hag heñ d'ar gêr!

..

Edo an holl Vigouened ouz e c'hortoz mall ganto gouzout.

— Baztagn, paotred! gouzout a ran bremañ perak e vezont mestr d'comp dalc'hmat.

— Perak 'ta, eme an holl?

— Abalamour d'o spered!

— Ar spered! eme an holl, met petra eo an dra-se, ar spered?

— A! n'ouzoc'h ket? Gortozit...

Hag heñ sellet en-dro d'ezañ... Allaz! gwezenn ebet tro-war-dro!... Met, eul lue'hedenn skedus a darzas en e benn:

— Lakomp, emezañ, e vijenn-me eur wezenn. Neuze, unan ac'hanoc'h - te Laou Rafalen - red du-hont betek kant metr ac'hann, E-keit-se, me a lakaio va dorn

dehou war va zal, evel ma vefe garr eur wezenn. Pa rin sin d'it, deus warnoun a-benn-herr. Erruet ganin, e tistagi war va dorn eur mell taol ken kreñv ha ma c'helli.

Laou Rafalen a redas. An holl a bep tu a reas plas d'ezañ. Hag heñ distrei evel eun tenn. Erruet gant Youen e tistagas d'ezañ eur mell taol darn serret, Hemañ o soñjal beza ken fin hag ar Glazig, a dennañ e zorn abred a-walc'h, hag e resevas, e-kreiz e dal, eur stokadenn ken bras ma voe semplet war an taol.

Pa deuas ennañ e-unan, e c'houlenne digantañ ar Vigoudened :

— An dra-se eo kaout spered ?

— Ya, emezañ, an dra-se eo !

Hag an holl a gomprenas.

Klevet gant eur Melenig
ha kontet gant eul Leonad.

LAVARIOU MIZ EBREL

Bloavez gliz
Bloavez gwiniz.

Pask pe Gazimodo
En ebrel sur a vezo.

Pa vez glao da c'houel Mark
E kouez ar c'hignez er ark.

Etre Pask ha Pantekost
Ez eus seiz sizun penn ha lost.

Bleunvi e meurz, furmi en ebrel
Eus ar re se ne vezimp ket gwell;
Bleunvi en ebrel, furmi e mae
Eus ar re se e kargimp hor sae.

Krenn-lavarioù Pask

Da wener ar Groaz
He neiz ar big a groaz

Da Sul 'r Bleuniou, konta'r viou;
Da Sul Fask, terri o fennou;
Da Sul ar C'hazimodo, terri ar c'hoz po-
[dou]

E-pad ar Sizun Santel
Amzer goloet, avel.

D'ar Sul Vleuniou
E lamm ar saout dreist ar c'hleuziou.

D'ar Sul Fask
E lamm ar saout dreist o nask.

Ouz an heol Meurlargig,
Ouz an eteo Paskig

An Ened see'h, Pask kailharek
'Lak an arc'h da veza barrek.

Pask glehorek,
Eost baraek.

Pask a dost, Pask a-bell,
Pask a vo en Ebrel,
Pask en Ebrel a vo
Pe ar c'hazimodo!

Etre Pask ha Meurlarje
Seiz sizun nemet daou de
Etre Pask ha Pentekost,
Seiz sizun penn ha lost.

Diwar ARVOR 168 (9-4-44)

Ar brezoneg er Skol-Veur

An holl a oar e vez graet brezoneg e Skol-Veur Roazon, ha gant eur beleg zoken : an aotrou Falc'hun.

Nebeutoc'h a zo o c'houzout, marteze, e vez graet ivez brezoneg e Skol-Veur « Angers ». Setu peza lennomp e niverenn miz genver war ar « Bulletin des Facultés Catholiques d'Angers » :

« ...Skol-Veur Angers he deus savet evit ar bloaz-man prezegennoù ha kentelioù brezonek evit an neb a gar.

E kêr Angers, ha tro-war-dro, ez eus kalz Bretoned o chom. Er Skol-Veur, ar studierien Vreizad a zo niverus.

Roel e vez eno kentelioù war a bep seurt yezou. Iskis e vefe lezel a gostez yez eul lodenn vat eus ar studierien hag a zo ar peza chom eus eur yez bet komzet, eur mare a zo bet, en Europ a-bez.

Al lennegezh brezonek a zo koulz lavaret dianav e Bro-C'hall, hag ar peza zo eur vez, dianav end-eeun, d'ar Vretoned desket, o unan. Koulskoude n'eo ket oberennou a dalvoudegezh eo a vank d'ar brezoneg, ha bevoc'h eo hirio e lennegezh eget n'eo bet biskoaz.

Ar c'hentelioù hag ar prezegennoù-se a vez roet gant an Ao. Toulemon, beleg kelenner er Skol-Veur.

Ar prezegennoù a zo roet hervez ar roll-man : 1°) Istor ar yez hag al lennegezh breizek. — 2°) An drama brezonek er grenn-amzer. — 3°) Bilzig pe buhez ar bugel e Breiz. — 4°) Eur Barz kristen : Y. B. Kalloc'h. — 5°) Eun dramaour a vremen : Tanguy Malmanche. — 6°) Oberou Jakez Riou. »

Tezenn an Aotrou Chaloni Falc'hun

An ao Chaloni Falc'hun, kelenner war ar brezoneg, e Skol. Veur Roazon, en deus tremenet e Roazon, d'ar 7 a viz Meurz, gant enor ha brasa meuleudi an holl varnerien, eun dezenn war istor ar brezoneg.

Laouen omp, o rei da c'houzout d'hon lennerien ar c'helou mat-se, ha kinnig a reomp hor gwella gourc'hemennou d'un ao : Chaloni Falc'hun. E oberenn-veur a daol eur sklerijenn nevez war istor hor yez. Ra vo lennet ha studiet gant an holl Vretoned desket, ha ra zigaso war dachenn ar brezoneg studierien, bemdez niverusoc'h.

Evit kaout levr an ao. Falc'hun, skriva da : Abbé P. J. Nédélec, secretariat, évêché, Quimper. Priz 400 lur.

Dre Vreiz ha dre ar bed

BLEUN-BRUG HAG Y.K.A.M.

Ar Bleun-Brug en deus kinniget bep a skeudenn (statu) eus Santez Anna d'ar baotred yaouank eus ar J.A.C. a zo bet da genta evit kana ha korta istoriou e brezoneg, evit « La coupe départementale de la joie au village », bet e Klegereg, Morbihan, d'an 11 a viz meur, hag e Brasparz d'al lun Fask. Enor d'ar re yaouank a zalc'h da yez o Zadou! Pedet eo ar re-mañ da zont adarre da gana ha da gontia rimadellou, da Zantez-Anna-Wened, deiz ar Bleun-Brug, ar re bet priziet, met ivez ar re all.

Unvaniez an Y.K.A.M. he deus embannet eun eurig pedennou e brezoneg evel ma ra bep bloaz : « Aotrou, hor savetell, amaomp o vont da goll ! » Servijout a c'hell evit ar parrezioù, dreist-holl e bloavez ar Jubile. E gwerz er chomlec'h-mañ : Direction des œuvres, rue Feunteunig al Lez, Quimper.

Meuleudi da renerien an Y.K.A.M. ha na daolont ket disprij war ar brezoneg, met a gendalc'h da rei d'ar yaouankizou diwar ar mēz fouge eus o yez hag eus kement a sell ouz pinvidigeziou Breiz.

AR FILM BLEUN-BRUG

Ne vo ket, moarvat, sulou a-walc'h er bloaz, evit kontanti an holl. Bet eo ar film dija e meur e lec'h e Leon, Kerna ha Gwened, Lammal en deus graet betek Comboung (Ille-et-Vil.) ha goulennet eo da vont pelloc'h c'hoaz. Ha c'houl, ha fellout a ra d'eoc'h ivez o welout ? (Film 16 mm.) Feurmet e vez evit 500 lur. Her goulenn digant « Secrétariat, Bleun-Brug, Treboul (Finist.).

AR 7 A VIZ MEURZ E SANTEZ-ANNA-WENED

Brudet bras eo Pardon Santez-Anna-Wened ar 26 a viz Gouere. Nebautoc'h eo ana-vezet hini ar 7 a viz Meurz, deiz-ha-bloaz dizoloidigez ar skeudenn santel gant Nikolazig. Bihanoc'h eo ar gouel-mañ. Breizekoc'h ha devotoc'h eo, avat, eget ar gouel bras. Ne vez ennañ e-doug an deiz nemet brezoneg flour Bro-Wened, an hini a gomzas hag a garas Nikolazig.

BRETONED PARIZ

Kelou a zeu d'eomp ez eus savet e Pariz eur c'hoariva brezonek, gant strollad Bleun-Brug Pariz. Roet en deus hemañ dija, meur a abadenn d'ar Vretoned harluet a zeu niverus ha laouen da selaou peziou-c'hoari e yez o c'havel.

E-keit ha ma welomp ar patronajou o tilezel da vad ar brezoneg en o abadennou eo frealzus bras gwelout skouer vat Bretoned Pariz.

BLEUN-BRUG DREIST AR MOR

War ar « Pelerin », 26 a viz genver, e lenner kement-mañ : « An Aotrou Atlee, kenta ministr Breiz-Veur, en deus kaset eur bodig brug d'eun Amerikaner 7 vloaz. (E Bro-Amerika ne gaver ket a vrag moarvat.) Ano ar plac'hig-mañ eo « Heather » da lavarout eo « brug » e brezoneg. Goulenn a reas houmañ digant an Aotrou Atlee, kas d'ez eun bodig heñvel ouz an hini a zouge war e chupenn en deiz ma tiskennas eus ar c'harr-nij, e Bro-Amerika, da geñver e ziweza beaj.

An Ao. ministr en deus prometet ha dalc'het d'e c'her.

AR BREZONEG E PENN PELLA AR BED

Ral eo d'eur brezoneger aet pell diouz e vro kaout disprij ouz ar brezoneg.

E-touez ar visionerien, ar soudarded, ar vartoloded, ar gargidi aet da bell bro, e kaver alies karourien vras d'ar brezoneg.

Kelc'hiou-keltiek brezonekoc'h eget re Vreiz a gaver en Indo-Sina er Maroc, er Algerie, er Senegal hag all...

Daoust ha Bernicot oc'h ober tro ar bed en e vag « Anita », ne voe kanet d'ezañ eun deiz, en eun tu bennak e Bro-Afrika, eur ganaouenn vrezonek gant eun foullad bugale zu ? Eul leanez vreizat eo a rae skol d'ezo, ha setu...

Breudeur eus Urz Ploermel, a zalc'h eur skolaj e enezenn Tahiti, penn pella ar bed. Warlene, da geñver gweladenn unan eus Penn-renerien an Urz, eur Breizad, e voe kanet en e enor gant holl vugale ar skol « Kousk Breiz-Izel », e brezoneg ha korollet d'ezañ eur gavotenn.

Ne weler ket alies, siouaz ! kemend all e bro ar brezoneg !!

SANTEZ ANNA EUR VREIZADEZ ? !

An Ao. Is-Amiral L. a skriv d'eomp kement-mañ : « En unan eus niverennou koz « Feiz ha Breiz », eur marvailher a lavar : « Santez Anna, Mamm-goz ar Vretoned, ganet e Douarnenez, evel ma oar an holl. »

Setu, neketa, eur marvailh kaer, gwir marteze ? An Aviel ne lavar deomp netra eus bro c'henidik Mamm-goz Hor Salver.

En gorloz e vijer eta, da gavout d'ez e-leiz a chapelioù tro-dro da Zouarnenez... Hogen, kartenn « Bleun-Brug » C'houevrer, pajenn 4, a ziskouez emañ an darn-vuia eus he chapelioù e Bro-Leon. Ha bez' e c'hellfer gouzout ar perak eus kement-se ? Kement ha goulenn, karout a rafen e teufe ar respont digant lennerien « Bleun-Brug ». (Ac'hanta, piou a responto ?)

TUD BRO-SKOS HAG AR MAEN LAERET

Emañ tud Scotland Yard (polised vras Bro-Saoz, evel a'ouzoc'h) o virvi, o firbouchal, o furchal, o klask hag oc'h enklask a bep tu, nec'het bras. Piou en deus laeret ar Maen ? Maen Scone, maen sakr Bro Skos, an hini ma veze gwechall sakret warnañ rouaned Bro Skos hag a oa bet laeret gant rouaned Bro Saoz da vezañ sakret int ivez warnañ. Ha setu, miret ma oa e tron ar Roue e Westminster eo bet laeret da noz Nadaleg gant den na oar piou. Skosiz a lavar evel just en deus ar Maen kemeret treid evit distrei da Vro Skos, peogwir eo Skosiz e zo perc'honn warnañ, hag e kav d'ezo eo mat ar jeu : mar fell da roue Bro Saoz beza ivez roue Bro Skos, n'en devo nemet dogt da vezañ sakret ganto hag en o zouez. Daoust da Skosiz bezañ feal d'ar Roue, ne fell ket d'ezo beza kontet evit priz ebet, e-touez ar Saozon, hag e plijfe d'ezo ren un tammig muioc'h o aferioù : ha setu perak emañ polised Scotland Yard o furchal, o firbouchal... ha ne gavont na den, na netra, na roudoù ar Maen...

BET E ROM EDOUG AR BLOAZ SANTEL

Kazetonn ar Vatican he deus roet da anaout, n'eus ket pell, ez oa bet e Rom, e kerz ar bloaz tremenet, tri million a birc'hirined.

Setu ar breioù o deus kaset ar muiad tud : Itali : 1.660.000 den ; Frans : 210.000 ; Almag : 105.000 ; Amerik : 105.000 ; Suis : 67.000 ; Beljik : 56.000 ; Bro-Saoz : 51.000 ; Iverzon : 33.000 ; Afrik : 28.000 ; Autrich : 25.000.

Bloaz santel, bloaz pinvidik ha frouezus evit an Iliz a bez hag evit ar gristenien o deus bet an eur-vat da zaoulina e-harz treid Hon Tad Santel ar Pab ha da c'hounit o Jubile.

KATOLIKED AN AMERIK O KRESKI

D'ar mare ha ma weler e Bro C'hall, hag ive siouaz, e Breiz, kement a dud o tilezel hent an ilizou, eus an Amerik e teu d'eomp keleier frealzus kenañ.

Abaoue trizek vloaz 'zo, ouspenn eur milion a dud vras a zo en em c'hraet katolik.

Evit ar bloaz, 1949, nemet-ken, 120.000 den o deus en em staget a wir galon ouz Iliz Rom. Kalz eus ar re-mañ a oa protestanted.

Al labour gaer-se a zo bet graet gant an Emzao katolik, birvidik en Amerik, hag ive dre brezegennou displeget er Radio.

AR BLEIZ PESKIG

gant Korantin Riou

E miz c'houevrer mil pell 'zo, e kejas ar bleiz Kof-Naon gant marc'hig Yannig Gerc'hon.

Kof-Naon en doa debret eun dañvad e Kergov prestik a-raok. Setu 'ta ne oa ket goull e zac'h.

— « Mont a ra, Kerc'hon? — Fall-fall, Kof-Naon. N'eo ket eohu 'r goañv; nebeut da chaokat, hag an derzienn-Spagn. — Aon ac'h eus da veza brevet ganin me? Emaout 'ta o klask digareziou. — Feiz! ne vefe ket eur blijadur evidoun, hag evidout-te kennebeut. — A lavarez-te! — Ha sur oun. Petra oun-me bremañ? Eur bern eskern goloet gant kroc'hen teo ha kalet, ha reun hir. Met me 'lavar dit, Kof-Naon, e miz ebrel, pa gano 'l labousedigou en o neizou, neuze e vin fin penna-benn; bleo, kroc'hen, kig ha spered. — Da genta ' viz ebrel 'ta 'n em gavimp er park tirienn tric'horn. Hag... — E tebri ac'hanoun, Kof-Naon, gant plijadur evidout-te hag enor bras evidoun-me. »

Lakaat 'reas ar bleiz e bao dehou a raok war hini 'r marc'hig. Graet ar marc'had.

**

Kenta 'viz ebrel, Yannig, e vreur ha paotred Kergreiz, Kerlosket... a vez alies o furchal ar c'haeou hag an ilio. Marc'hig Kerc'hon, heñ ivez, a blij dezañ an nevez-amzer: muloc'h a beuri a gav; tevat 'ra; bliou eo e zaoulagad.

Ar bleiz n'en deus ket dizonjet promesa 'r marc'hig. Ha setu m'en em gav d'an deiz merket er park tirienn tric'horn.

— « Emaout prest, Kerc'hon? » eme Kof-Naon, krak ha sec'h. « Feson gaer 'zo warnout. » (Lipat' ra 'r bleiz e vuzellou.) — Bravik a-walc'h, bleiz. E miz mae 'vat, e vin kaeroc'h c'hoaz. Te 'oar, Kof-Naon, « e miz mae, e taol ar c'hezeg o zae. » — Ta, ta...! Miz 'm eus gortozet. Echu 'r goañv. Emañ 'r c'henta viz ebrel? Ya pe nann? Deut eo an devez merket en hon divizou. Pemp munu 'vit lavarout da bateriou da zoue 'r c'hezeg. — Na chomomp ket amañ, Kof-Naon. — Hañ? — Komprenit, Aotrou Bleiz. N'oun ket gwall zrus c'hoaz. Sec'hed ho po o tebri ac'hanoun. Sonjet 'm eus e vefe mat d'eo'h kaout dour tost pa zebrot ac'hanoun. Eomp 'ta betek lenn Koad Tyvarlen. — Spered kaer-dispar ac'h eus, marc'hig Kerc'hon. Ha kalon dener. Kerz dirazoun! Plouz! Foenn!...

**

P'erruas e-kichen al lenn, e youc'has ar marc'hig a-bouez-penn: « Aiou! Aiou! Iou-lou! Va fao! — Petra 'zo, eme 'r bleiz. — Aiou! Iou-lou! Eun tach em fao dehou adreñv. Eur mell tach! Aiou! Tennit anezañ kuit, pe 'vlot mouget gantañ! — Emaomp erruet, paotrig. Ho! ma welin penaos emañ da bao. »

En eur jlgamm ez eas ar marc'hig war-du ribl uhela 'r poull, ha chom a-sav, e bao klañv troet ouz an dour.

Kof-Naon a dostaas 'vit sellout ouz ar pao. « O-O, emezañ, koeñvet eo! Alo! kaezig, chom sioul hag e tennin er-maez an tach daonet-se! » Daoulina 'reas evit kregi er pao.

N'eo ket eun tach a welas! Met eun dousenn! Ha stered a-vil-vern. Rak d'an ampoent e tistagas marc'hig Kerc'hon eun taol pao ken start ma eilpennas Kof-Naon dreist ar ribl ha « plouf » e kreiz al lenn!

Ha marc'hig Kerc'hon da hopal: « Peskig ebrel, Kof-Naon! Chañs vat dit da gaout spered fin en dour yen! »

Ha kuit d'an daoulamm: trip ha trip, trip ha trip! da gonta da Yannig penaos e oa deut bleiz da veza peskig.

K. RIOU.

KORN AL LIZIRI

« Kroaz-Breiz » a vo bremañ « Bleun-Brug », gwell-a-se!... Daoust ha gwelet a reor adarre istoriou Petromig e-barz evel er « Vuhez Kristen » gwechall? ha traou da blijout d'an dud abalamour d'o lakaat da lenn brezoneg.

N'eus nemet ober diouz al lennerien: daou rummad anezo:

1) An dud troet war ar brezoneg hag a lenno n'eus forz petra nemet e vo e brezoneg. Ar bras a zo keriz.

2) Ar re all hag a zo holl diwar ar mēz. Diouto eo ober. Kemeret a raint ar gelaouenn ma plij. Petra 'blij d'ezo? — N'eus nemet gwelet petra 'vez roet d'ezo da lenn en o c'he-laouennou all, ar re a resevont ar muia: « Le paysan Breton », « La France agricole », « Terre et Progrès », « Mon village », « Foyer rural »... hag er re-se, gwelet peseurik tammou a blij ar muia: 1^o) d'ar re yaouank, 2^o) d'ar merc'hed, 3^o) d'ar wazed.

Amañ, er barrez, omp staget d'ober eun tamm enklask war ar sujed-se. Emaer a vont d'ober eun taoliad gant an embannadurioù katolik dre ar barrez: « La Vie Catholique », « Le Foyer rural », « Le Pèlerin ». Dipitus eo ne vije ket unan vrezonek ganto. Mat n'eo ket re ziwezat. Kenta 'zo da ober eo kas traou a verniou da lenn, en tiez, evit netra. niverennou koz ha nevez. Goude, dastum koumanantou... pe gwerza dre niverennou a di da di. Ar re yaouank karget eus an dra-se, n'o do netra all d'ober er J.A.C. Daoust ha possubl e vije ober kement all gant « Bleun-Brug »?...

E. J.

Setu eul lizer talvoudus ha kentelius. Bennoz Doue da E. J. Ra vo heuliet e skouer gant kalz parrezioù. Bez' e c'hellez, a-dra-zur, Mignon ker, goulenn diganeomp niverennou koz ha nevez evit bruda « Bleun-Brug ».

« Bleun-Brug » niv. 33 a oa gwelloc'h eget niv. 34. An notennou « Dre Vreiz ha dre ar Bed » a zo plijus ha skrivet en eur brezoneg saourus-tre. Ma c'hellan rei eun ali: Lakait ar pouez war al labour graet a-hed ar bloaz er skolioù kentoc'h eget war ar gouel. Kelaier diarbenn al labour-se a blijfe d'an dud, a gredan.

P. D.

...Niverenn C'houevrer « Bleun-Brug » a zo gwellaenn enni kalz: moula, paper, lize-rennou...

H. K.

...« Je suis très heureux d'avoir appris l'existence du Bleun-Brug, surtout que vous travaillez pour être, à la fois, un mouvement d'élite et un mouvement populaire comme l'ont montré les journées de Saint-Pol-de-Léon.

» Je souhaite que votre mouvement vienne réveiller les bonnes volontés et qu'il fasse tache d'huile. Ce sont les mouvements comme le vôtre qui seuls, peuvent endiguer la menace du règne de la « 25^e heure »: Défendre une âme collective, c'est défendre toutes les âmes individuelles qui s'en nourrissent.

» C'est pourquoi je fais de grand cœur les vœux les plus ardents pour votre combat... »

Abbé L. R. (I.-et-V.)

AR BLEIZ PESKIG

gant Korantin Riou

E miz c'houevrer mil pell 'zo, e kejas ar bleiz Kof-Naon gant marc'hig Yannig Gerc'hon.

Kof-Naon en doa debret eun dañvad e Kergov prestik a-raok. Setu 'ta ne oa ket goulo e zac'h.

— « Mont a ra, Kerc'hon? — Fall-fall, Kof-Naon. N'eo ket eohu 'r goañv; nebeut da chaokat, hag an derzienn-Spagn. — Aon ac'h eus da veza brevet ganin me? Emaout 'ta o klask digareziou. — Feiz! ne vefe ket eur blijadur evidoun, hag evidout-te kennebeut. — A lavarez-te! — Ha sur oun. Petra oun-me bremañ? Eur bern eskern goloet gant kroc'hen teo ha kalet, ha reun hir. Met me 'lavar dit, Kof-Naon, e miz ebrel, pa gano 'l labousedigou en o neizou, neuze e vin fin penna-da-benn; bleo, kroc'hen, kig ha spered. — Da genta ' viz ebrel 'ta 'n em gavimp er park firienn tric'horn. Hag... — E tebri ac'hanoun, Kof-Naon, gant plijadur evidout-te hag enor bras evidoun-me. »

Lakaat 'reas ar bleiz e bao dehou a raok war hini 'r marc'hig. Graet ar marc'had.

.

Kenta 'viz ebrel, Yannig, e vreur ha paotred Kergreiz, Kerlosket... a vez alies o furchal ar c'haeou hag an ilio. Marc'hig Kerc'hon, heñ ivez, a blij dezañ an nevez-amzer: muloc'h a beuri a gav; tevaat 'ra; bliou eo e zaoulagad.

Ar bleiz n'en deus ket dizonjet promesa 'r marc'hig. Ha setu m'en em gav d'an deiz merket er park firienn tric'horn.

— « Emaout prest, Kerc'hon? » eme Kof-Naon, krak ha sec'h. « Feson gaer 'zo warnout. » (Lipad' ra 'r bleiz e vuzellou.) — Bravik a-walc'h, bleiz. E miz mae 'vat, e vin kaeroc'h c'hoaz. Te 'oar, Kof-Naon, « e miz mae, e taol ar c'hezeg o zae. » — Ta, ta...! Miz 'm eus gortozet. Echu 'r goañv. Emañ 'r c'henta viz ebrel? Ya pe nann? Deut eo an devez merket en hon divizou. Pemp munut 'vit lavarout da bateriou da zoue 'r c'hezeg. — Na chomomp ket amañ, Kof-Naon. — Hañ? — Komprenit, Aotrou Bleiz. N'oun ket gwall zrus c'hoaz. Sec'hed ho po o tebri ac'hanoun. Sonjet 'm eus e vefe mat d'eo'h kaout dour tost pa zebrot ac'hanoun. Eomp 'ta betek lenn Koad Tyvarlen. — Spered kaer-dispar ac'h eus, marc'hig Kerc'hon. Ha kalon dener. Kerz dirazoun! Plouz! Foenn!...

.

P'erruas e-kichen al lenn, e youc'has ar marc'hig a-bouez-penn: « Aiou! Aiou! Iou-iou! Va fao! — Petra 'zo, eme 'r bleiz. — Aiou! Iou-iou! Eun tach em fao dehou adreñv. Eur mell tach! Aiou! Tennit anezañ kuit, pe 'viot mouget gantañ! — Emaomp erruet, paotrig. Ho! ma wellin penaos emañ da bao. »

En eur jilgammal ez eas ar marc'hig war-du ribl uhela 'r poull, ha chom a-sav, e bao klañv troet ouz an dour.

Kof-Naon a dostaas 'vit sellout ouz ar pao. « O-O, emezañ, koeñvet eo! Alo! kaezig, chom sioul hag e tennin er-maez an tach daonet-se! » Daoulina 'reas evit kregi er pao.

N'eo ket eun tach a welas! Met eun dousenn! Ha stered a-vil-vern. Rak d'an ampoent e tistagas marc'hig Kerc'hon eun taol pao ken start ma eilpennas Kof-Naon dreist ar ribl ha « plouf » e kreiz al lenn!

Ha marc'hig Kerc'hon da hopal: « Peskig ebrel, Kof-Naon! Chañs vat dit da gaout spered fin en dour yen! »

Ha kuit d'an daoulamm: trip ha trip, trip ha trip! da gonta da Yannig penaos e oa deut bleiz da veza peskig.

K. RIOU.

KORN AL LIZIRI

« Kroaz-Breiz » a vo bremañ « Bleun-Brug », gwell-a-se!... Daoust ha gwelet a reor adarre istoriou Petromig e-barz evel er « Vuhez Kristen » gwechall? ha traou da blijout d'an dud abalamour d'o lakaat da lenn brezoneg.

N'eus nemet ober diouz al lennerien: daou rummad anezo:

1) An dud troet war ar brezoneg hag a lenno n'eus forz petra nemet e vo e brezoneg. Ar bras a zo keriz.

2) Ar re all hag a zo holl diwar ar miz. Diouto eo ober. Kemeret a raint ar gelaouenn ma plij. Petra 'blij d'ezo? — N'eus nemet gwelet petra 'vez roet d'ezo da lenn en o c'he-laouennou all, ar re a resevont ar muia: « Le paysan Breton », « La France agricole », « Terre et Progrès », « Mon village », « Foyer rural »... hag er re-se, gwelet peseurik tammou a blij ar muia: 1^o) d'ar re yaouank, 2^o) d'ar merc'hed, 3^o) d'ar wazed.

Amañ, er barrez, omp staget d'ober eun tamm enklask war ar sujed-se. Emaer a vont d'ober eun taoliad gant an embannadurioù katolik dre ar barrez: « La Vie Catholique », « Le Foyer rural », « Le Pèlerin ». Dipitus eo ne vije ket unan vrezonek ganto. Met n'eo ket re ziwezat. Kenta 'zo da ober eo kas traou a verniou da lenn, en tiez, evit netra, niverennou koz ha nevez. Goude, dastum koumanantou... pe gwerza dre niverennou a di da di. Ar re yaouank karget eus an dra-se, n'o do netra all d'ober er J.A.C. Daoust ha possibl e vije ober kement all gant « Bleun-Brug »?...

E. J.

Setu eul lizer talvoudus ha kentelius. Bennoz Doue da E. J. Ra vo heuliet e skouer gant kalz parreziou. Bez' e c'hellez, a-dra-zur, Mignon ker, goulenn diganeomp niverennou koz ha nevez evit bruda « Bleun-Brug ».

« Bleun-Brug » niv. 33 a oa gwelloc'h eget niv. 34. An notennou « Dre Vreiz ha dre ar Bed » a zo plijus ha skrivet en eur brezoneg saourus-tre. Ma c'hollan rei eun ali: Lakait ar pouez war al labour graet a-hed ar bloaz er skolioù kentoc'h eget war ar gouel. Keleier diarbenn al labour-se a blijfe d'an dud, a gredan.

P. D.

...Niverenn C'houevrer « Bleun-Brug » a zo gwellaenn enni kalz: moula, paper, lize-rennou...

H. K.

...« Je suis très heureux d'avoir appris l'existence du Bleun-Brug, surtout que vous travaillez pour être, à la fois, un mouvement d'élite et un mouvement populaire comme l'ont montré les journées de Saint-Pol-de-Léon.

» Je souhaite que votre mouvement vienne réveiller les bonnes volontés et qu'il fasse tâche d'huile. Ce sont les mouvements comme le vôtre qui seuls, peuvent endiguer la menace du règne de la « 25^e heure »: Défendre une âme collective, c'est défendre toutes les âmes individuelles qui s'en nourrissent.

» C'est pourquoi je fais de grand cœur les vœux les plus ardents pour votre combat... »

Abbé L. R. (I.-et-V.)


C'HOARIOU

Evit beilhadennoù miz Ebrel

DIVINADENNOU

1. Eur gazeg wenn kignet
E-kreiz eur parkad lann bleuniet.
Petra eo?
2. Peder blac'h yaouank o vont gant an
[hent :
Na pa rafe glao evel mein
Na gouezfe berad war o c'heir.
Petra eo?
3. Hir 'vel eur gordenn, kordenn n'eo ket;
Plad 'vel eur c'holvez, golvez n'eo ket;
Aon 'rafe da galz ma komzfe;
Petra 'gredez bremañ e ve?

Gerioù Kroaz : N° 26



A-blaen: 1. Ti eur roster. — 2. Toull
eur c'hae. — Manati skosat brudet. — 3.

N'eo ket te - bez' e teue plu d'in. — 4.
Penn Adam - Breur da SETU. — 5. Sant
eus Bro-Dreger. — 6. Lost an deiz (dis-
taget 'vel e Kerne). — 7. Brao da glevout
pa vez sec'hed - Penn bigi - E-barz al...
— 8. Kontadenn rimet.

A-serz: 1. Saver romantou. — 2. Ster
gaer - Digant ar yar. — 3. Penn SETU -
An diou drederenn eus SPI. — 4. Impli-
jet a-wechou e-lec'h ABAOE. — 5. Eur
skrid adskrivet. — 6. Pennou-bras. — 7.
Meurlarjez e Kerne - Spered. — 8. Skrid
pe gomzou evit displega - (goude E).

Gerioù Kroaz : N° 25

	1	2	3	4	5	6	7	8	9
1	S	T	E	R	E	D	E	N	N
2	I	R	I	N		A	R	A	T
3	L	I	R		L	O	E	N	
4	V		E	T	A		N	N	
5	I	T		R	O	E			S
6	D	U	L	E	N	N		T	I
7	I	R	I	N		E	V	A	
8	G	I	N		T	O	E	N	N
9	E	E			E	U	R	E	D
10	Z	R		K	I		B	T	

Respont da zivinadennoù miz Genver

1. Ar bann heol. — 2. Eul linsar-wele.
3. An orolaj.

PESKIG EBBREL

Pa oan yaouank eun bet kaset da glae ar c'houde hag an aked da labourat
da di an amezog. Respontet e voe d'in : « Re zivezat out en em gavet. Emaer o
paouez o rei da Ber ar c'hantonier a zo bet ivez ouz o c'hask er mintin-mañ. »

Araok distrei d'ar gêr em boa komprenet e oan bet paket.

Kantikou Bleun-Brug Santez-Anna

D'alc'hit ar bajenn-man ganeoc'h evit ar Bleun-Brug. Setu an ton
kanet e Bro-Wened evit ar c'hantik a zo aman warlec'h. Eur fazi
a oa ennan e niverenn miz c'houevrer.

ROUANEZ AN ARVOR

Poz: Itron Santez An - na , Ni ho ped a ga - lon,
Ni en em lak gant joa Dindan ho protek - sion . —

Diskan: O Rouanez karet an Ar - vor , O Mamm leuna dru - e ,
War an douar war - vor , Goarnet ho pu - ga - le . —

DISKAN :

O Rouanez karet an Arvor,
O Mamm leun a drue,
War an douar, war vor
Goarnet ho pugale.

1

Itron Santez Anna
Ni ho ped a galon :
Ni en em lak gant joa
Dindan ho proteksion.

2

Ho kalon 'zo digor
'Vit holl ar Vretoned
An dud eus an Arvor
Ho kar ive bepred.

3

Patronez Breiz-Izel,
An Arvoriz gant gred
A c'houlenn ho skoazell :
O zikourit bepred.

4

Itron leun a zouster,
En hon holl ezommou
Diskoait en hor c'henver
Galloud ho pedennoù.

5

E labouriou kalet
E tremen hor buhe :
Diouz peb droug, Mamm garet
Hon diouallit bemde.

6

Hor c'horf hag hon ene
A ouestlomp d'eoc'h joalus,
O Mamm, eus lein an nenv
Bet ouzomp truezus.

7

Hon diouallit o Mamm
Diouz ar pec'hed marvel,
'Vit m'hor c'havo divlamm
Ar Barner eternal.

ITRON SANTEZ ANNA

(War don :
D'hor Mamm Santez Anna)

Diskan

Itron Santez Anna
Goarnet ho Pretoned,
Goulennit dreist pep tra,
Ma vint fidel bepred.

1

Evidompp pebez gloer
Ha pebez levne,
Pa 'z eo deut d'hor c'hemer
Evit he bugale !

2

Evidomp-ni emañ
He c'harantez vrasa ;
Evidomp-ni e ra
He burzudou kaera.

3

Pegement a re glañv
O deus outi rekour ;
Hag en drougou gwasa
A gav outi sikour !

4

Pet kwech he deus rentet,
O madelez hep par !
D'ar re zall ar gwelet,
Ar c'hleved d'ar bouzar.

5

Pet kwech war ar mor bras,
Da dud a ya da goll,
He gweler o tigas
Avel vat en eun tól !

6

N'eus forz gant peseurt poan
E vefec'h ankenlet :
Hi a wella buan
Ar c'horf hag ar spered.

Diskan all :

O Anna Mamm Mari
A galon ni ho ped :
Diouz pep droug goarnet-ni ;
Grit ma vimp holl salvet.

7

Tud yaouank hag a venn
Servicha mat Doue,
Deut amañ da c'houlenn
Trec'hi ar fallente.

8

Pedit, mammou tener,
Evit ho pugale.
Diouti kemerit skouer :
Hi ' zo bet mamm ivez.

9

Ar gwerc'hezed ganti,
Sur a vo selaouet :
Mamm ar Werc'hez Vari
A gar ar gwerc'hezed.

10

Ha c'houi labourerion,
Gant ar poaniou gwasket,
Pedit-hi a galon,
C'houi eo he deus choazet.

11

C'houi ive, tud a vor,
E-kreiz ar gwall amzer,
Pedit-hi d'ho sikour,
D'ho tenna a zanjer.

12

Dreistoc'h ha pa savo
Ar mor e houlennou,
D'ezl 'vit m'ho koarno,
Gouestlit ho kalonou.

(eus Kantikou Gwened)

E TI SOUFREREZ KERNE

F. BEGOT 13, straed Jean-Jaurès, QUIMPER
Téléph. 9.37

E vez dreset adteuzet evit ar gwella goloioù-kaoutchoug ar rodou
Gwerz a c'holoioù a bep ment — Labour vat, graet hep dale

MOUSSEUX SUPÉRIEUR "V^{VE} AUBIN"

Gwin-Spoumek Dreist
E gwerz e ti an holl Varc'hadourien-Gwin
dre ar Vro a-bez

Poupées. Broderies

Le MINOR
Pont-Sabbé

Bretagne

STAL LEVRIOU LE DAULT

16, Straed Ronan Madeg
KEMPER



Levriou brezonek, Gallek, ha skeudennou
RE GOZ, RE NEVEZ diwar-benn BREIZ

Prenet e vez ho levriou (ha goloioù koz) diganeoc'h
Betek en ho ti ma c'houlennit

Kleier Pask

Kleier, kleier,
sioul ha seder,
kleier er mintin
laouen ha lirrjin,
m' ha klev en dra dim
m' ha klev a bep tu...

Kleier, kleier, pelec'h oc'h-tu ?
Ha c'houi 'zo em tour arze ?
Ha c'houi 'zo e-barz an Ne ?...
Pe c'hoarz em c'hreiz-me ?

Kleier, kleierigou,
C'houi 'zo piou, c'houi 'zo piou ?
Oc'h-hu emmedigou ?
Oc'h-hu emecouigou ?
Oc'h-hu aeledigou ?

Kleier, kleier, kleier,
Soniou sklintin ha sklër,
toniou temer
mouezjou em èr
c'houezjou dister,
Kleier !

T. MALMANCHE
(Gutoan, ar mare'beg estranjour)